

SEIS GLAC'HAR .
AR VERC'HEZ GLORIUS VARI

KENTA GLAC'HAR.

Comsou ar Prophet Simeon.

O Guerc'hez, mam da Zoue, man a drugarez, dre ar glac'har ho peuz santet en ho calon pa deuas Simeon da lavaret deoc'h en devez ma presantac'h Jesus en templ, penaus « eur c'hleze a glac'har a dleie treuzi ho calon » roit deomp ners da c'housanv gant couraj ar poaniou a elfe aruout ganeomp evit na c'helfont biken distrei ac'hanomp deus servij an Aóutrou Doue.

AVE MARIA.

EIL GLAC'HAR.

Beaj ar Verc'hez en Egypt.

Mam a c'hlac'har, dre ar boan o peus anduret ho velet ar Roue Herodes ho lacat d'ar maro bugale Bethleem, ha re ar c'haeriu tro var dro, evit dont a benn evelse da laza ive ar Mabic Jesus, ha dre an oll boaniou ho peus gousanvet epad ma zoc'h bet en Egypt, hor c'honsolit, nli ho ped, epad ar veaj trist a reomp er bed man.

AVE MARIA.

TREDE GLAC'HAR.

Jesus Dianket.

Ho Guerc'hez Vari, mam a garantez, dre ar boan speret ag an anken hep par a oa en ho calon epad an tri devez ma oa bet dianket ho mab Jesus, obtenit deomp ar c'hraç n'her c'holimp james dre ar pec'het marvel. AVE MARIA.

PEVARE GLAC'HAR.

Jesus a zigouez gant e Vam var hent menez Calvar.

Mari guerc'hez leun a zouder, dre ar glac'har vras en deus treuzet ho calon pa veljac'h ho mab carantezus goloet a c'houezen, ha voad, hag a grainch, ho toughen e groas pouner da venez Calvar, obtenit deomp ar c'hraç da zoughen gant couraj hor c'broasiou ag hon afflictionnou.

AVE MARIA.

PEMPET GLAC'HAR.

Jesus Crucifiet.

Guerc'hez Vari, dre ar glac'har dreist muzul en deus rannet ho calon pa glevjac'h an toliou morsol ha pa veljac'h ho mab staghet ous ar groas, obtenit deomp ar c'hraç da gaout patientet

en hor c'hlenvejou ha da veza resinet dar maro pa blijo da Zoue hor gervel; goulennit digant ho mab ma c'hellimp crucifia hon inclinationou fall, renonç dezo evit biken ha beza purifiet gant goad ho mab Jesus. AVE MARIA.

C'HOUEC'HVET GLAC'HAR.

Jesus diskennet deus ar Groas.

Guerc'hez leun a garantez, dre ar glac'har a oa en ho calon a dre an daëlou puill ho peus scuillet pa oa diskennet Jesus deus ar Groas, ha lakeet etre ho triveac'h, obtenit deomp ar c'hraç da vouela hor pec'hejou, rag int so bet ar penn caus da gherent ho peuz gouzanvet, c'houi ag ho Mab Jesus, diskouezit deomp gouliau sacr hor Salver, ha roït deomp eur guir gontrition ag eur guir garantez. AVE MARIA.

SEISVET GLAC'HAR.

Jesus laket er bez.

Guerc'hez Vari, mam da Zoue, dre ar glac'har ag an enkrez ha boueze kement var ho calon pa oac'h ho sebelia korf hor Salver carantezus ag ho c'heulia anezan dar bez, obtenit deomp ar c'hraç da gaout eur maro mad, ha ma vezo

doughet hon ene dar Baradoz empad ma vezo
hor c'horf doughet dan douar. AVE MARIA.

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 12 Septembre 1891.

E. FLEITER,

Vicaire Général.